

18

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

TRIOUEC'HVED LEORIK :

BUGEL
BETHLEEM



BANNALEC.

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR.-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

TRIOUEC'HVED. LEORIK :

BUGEL BETHLEEM



BANNALEC.

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 25 Avril 1892.

Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

ÉVÊCHÉ
DE
COUTANCES
ET
AVRANCHES.

26 août 1890.

Mon Révérend Père,

Je suis très touché de l'envoi que vous avez bien voulu me faire de vos *Récits Bibliques*.

Votre travail est à la fois plein d'intérêt et d'opportunité.

A cette heure en effet où l'on ferme l'école à l'histoire sainte, où l'on ne peut lui donner au catéchisme qu'un temps insuffisant, vous remédiez efficacement au mal et vous rendez à nos enfants déshérités un précieux service.

Que MM. les curés, au lieu d'images si vite oubliées, distribuent le trésor durable de vos récits ; et l'histoire sainte reprendra sa place ; et, malgré tant d'efforts tentés pour les détruire, ses enseignements qui portent avec eux la lumière, la force et la consolation seront maintenus. Vous aurez conservé l'un des meilleurs aliments de notre foi.

En souhaitant à vos opuscules tout le succès qu'ils méritent, je forme les vœux les plus ardents pour qu'il vous soit donné de compléter au plus tôt, par l'histoire de l'Eglise, les récits de la Bible et de l'Evangile.

Recevez, je vous prie, mon Révérend Père, l'assurance de mes sentiments tout dévoués en N.-S.

† ABEL,
Evêque de Cout. et Avr.

ÉVÊCHÉ

Clermont-Ferrand, le 15 sept. 1890.

DE

CLERMONT.

Mon R. et cher Père Berthe,

J'ai pris connaissance de vos *Récits Bibliques*, et je m'empresse de vous remercier d'avoir entrepris cette œuvre, parce qu'elle me paraît répondre à un besoin général et urgent.

La prétendue neutralité a banni l'Histoire-Sainte de l'école publique ; et dès lors les enfants qui la fréquentent ne peuvent apprendre à connaître cette Histoire que par l'*Abrégé*, nécessairement bien court, placé au commencement du Catéchisme diocésain.

Quant aux élèves des écoles libres, ils sont, il est vrai, plus favorisés, puisque cet enseignement leur est donné en classe. Mais ils le reçoivent également à l'aide d'un *précis* qui, comme tel, doit résumer dans une proportion égale, les divers livres de la Bible. Et cependant, il y a tels faits, telles histoires particulières, qui, en raison de leur intérêt et de leur importance, demanderaient à être exposés en tous leurs détails et par écrit.

D'autre part, si le saint Évangile est encore lu dans les familles vraiment chrétiennes, la Bible est inconnue du plus grand nombre. Une traduction complète est trop volumineuse ; elle ne saurait d'ailleurs être mise aux mains de tous ; et un simple *Abrégé* semble n'être réservé qu'aux enfants.

Il fallait donc songer à extraire de l'Ancien et du Nouveau Testament, les récits qui offrent à l'intelligence et au cœur les enseignements les plus féconds ; et il fallait savoir en faire autant de petits livres qui pussent, grâce à la modicité du prix, se répandre dans les écoles et dans les familles.

Vous avez eu cette pensée, mon Révérend Père ; et vous la réalisez d'une façon admirable.

C'est pourquoi je vous remercie de tout cœur.

Durant nos Retraites Pastorales, je me suis fait un devoir de recommander votre publication au vénérable Clergé de mon Diocèse ; et je suis persuadé qu'il sera heureux d'en tirer profit pour le bien des âmes dont il a la charge.

Continuez donc votre noble entreprise ; — et que le Divin Maître lui accorde, pour sa gloire, bénédiction et succès !

Veillez recevoir, mon R. et cher Père, toute l'expression de ma religieuse reconnaissance en N.-S.

† P. PIERRE, évêque de Clermont.

ÉVÊCHÉ

Montauban, le 28 sept. 1890.

DE

MONTAUBAN.

Mon Révérend Père,

Je connaissais déjà quelques-uns de vos *Récits Bibliques* que j'avais lus dans la pieuse Revue, la *Sainte Famille*. Je les avais trouvés très intéressants et pleins de charme. Ceux qui ont paru depuis, ne le cèdent en rien à leurs aînés. En complétant la collection, vous faites une œuvre excellente, une œuvre qui est appelée à rendre les plus précieux services à l'éducation de l'enfance et de la jeunesse.

Autrefois, les enfants apprenaient à lire dans des livres qui leur enseignaient en même temps l'histoire de la religion. Parmi ces livres la Bible de Royaumont tenait la première place. C'était aussi un des livres qu'on aimait à lire dans les familles chrétiennes pendant les soirées d'hiver. Les enfants acquéraient ainsi de bonne heure la connaissance de tous les événements merveilleux qui remplissent l'histoire sainte. Préparation admirable aux enseignements du catéchisme et à la première communion.

Vos récits sont destinés à combler la déplorable lacune qui existe aujourd'hui dans la première éducation. J'ai profité des retraites ecclésiastiques pour recommander très instamment de les adopter comme récompense dans les catéchismes et dans les écoles religieuses, et j'ai été heureux d'apprendre qu'on en avait déjà demandé plusieurs milliers d'exemplaires.

Que Dieu daigne bénir votre œuvre et lui faire produire tout le bien que désire votre cœur d'apôtre.

Veillez agréer, mon Révérend Père, l'expression de mes sentiments respectueux et dévoués en N.-S.

† ADOLPHE, évêque de Montauban.

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.


Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testamant Coz ha Testamant Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

+ THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



BUGEL BETHLEEM

I.

ZAKARIAS.

Eost da bemp bloaz ha tregont a ioa ma z'oa eat ar stur euz a dribu Juda ha ma z'oa koezet etre daouarn leun-c'hoad Herodes. Epad pell amzer, pobl Doue a ioa bet var c'hed da eur prins galloudus a vije deuet da gass kuit euz ar vro an dianvezidi. Hogen Herodes, kerkent a ma oue mestr er vro, a reas peb tra evit miret outhi d'en hem zevel, ha skuilla'reas, beteg ar berad diveza, goad bugale kalounek Makakee. Klask a reas zo-ken ober d'an dud-se ankounac'haat relijion ho zadou, en eur zigass e Jerusalem gizioù ha kustumou ar gear baien a Rom. Guelet a rejot sevel, var an douar Santel, palezioù evit a bep seurt plijadurioù-noz. Dressi a reas ive tachennou,

ne ket evit an emgann, nag ar gourinerez, gat an dourn; mez gat ar c'hleze. Eno tud a gantchou a ziskenne d'en hem daga ha d'en hem laza didruez, evit plijadur ha divertissamant ar bobl. Sevel a reas, ouspenn, templou en henor an Impalaer August. Hennez ebken a anaveze hag a zouje evel doue.

Gouskoude, kaer en devoa, ne elle ket beza treac'h d'ar bobl hag hema, evit an darn vrassa, a jomme fidel da Zoue. Herodes, evit her gounid, en devoa great sevel an templ a Jerusalem en he za, ker kaer ha biskoaz.

En despet da-ze, ar bobl a ouele dourek var an dizurziou a vele bemdez e kear; hirvoudi a rea en eur zonjal en amzer guechall, e gloar Jerusalem, ha ne c'helle ket miret da vallozi an dianvezidi o devoa digasset kement a reuziou var ar vro. Pedit a reat ive stard an Aotrou Doue da zigass an Hini a ioa promettet abaoe keit amzer, hag o devoa ar brofeted lavaret anezha hen dije delivret ar bobl a Israël. Ouspenn-ze, an doktored euz al lezen a zeske d'ar bobl, er Sinagog, ne elle ket mui dale, an Hini a dlïe dont, ar Messias. Rak euz an dek-hatri-ugent sizunvezïad blavezïou merket gat Isaias evit donedigez ar Messias, peder ha tri-ugent a ioa eat dija a-biou. Ar bobl, var gement-se, a danvea eun nebeudik joa hag a gane a greiz-kaloun kantik koz ar Profed :

« Envou, lezit ho kliz da goeza varnomp; ha ma tigor an douar evit rei d'eomp hor zalver ! »

Eun taol burzudus diouezet en templ a deuas da greski ho fizians.

D'ar mare-ze e veve, en Hebron, eur belek koz,

hanvet Zakarias, mignoun da Jehovah. Diskenn a rea euz a ouenn beleien *Abia*, unan euz ar pevar var'n ugent famill a vije galvet peb hini d'he zro da ober servich an templ, e Jerusalem. He bried a ioa evel dha euz a famill Aaron hag a ioa Elisabeth he hano. Mignoun o daou da Zoue, e virent al lezen penn-da-benn; ha direbech dirak an dud, e vevent sioul e kreiz ho menezïou. Ar menezïou-ze ! Nak a draou kaer a lavarent d'ho spered ! Eno, daou vil bloaz araok, oa bet Abraham e chomm. Eno, e kichen derven Mambre, Jehovah her sakras prins ha mestr he bobl. Eno ive, edo he relegou e kichen Isaac ha Jacob. Guir vugale d'ar batriarched, Elisabeth ha Zakarias a vije kaoz etrezho aliez euz an amzeriou koz-se, evit doussaat eun nebeud ar poaniou rust o devoa brema da c'houzaon.

Evelato, e goeled ho c'haloun e zoa eur gouli. Kaer o devoa bet pedit ha goulenn, an oaled a ioa chommet ien; dizher oant. Brema oa deuet an oad varnho : Ne ellent mui goulenn eun heritour digat Doue; ha kalz nec'hamant o doa : rak beza eb bugale a ioa eul lastez dizenor dirak bugale Israël.

Diou vech bep bloaz, Zakarias a rea he zek leo evit mont da Jerusalem, da ober en templ al labour a zeree outha. Hogen, da viz guengolo, d'ar pem-ped blavez ha tregont ma oa Herodes gouarnner, ar re a ioa e penn ar pevar var'n ugent famill beleien a dennas d'ar zort, hervez ar c'hustum, evit rei he loden da bep hini e servich an templ. Zakarias a ioa deuet he dro hag hen eo a oue kemeret gat ar zort da ober ar zervich enorapla, da lavaret eo, da zevi ezans, mintin ha noz, var aoter ar c'hoezmad.

Eun abardaez, goude kuz heol, an drompill sakr a

c'halvas ar bobl da zont d'an templ. Zakarias, guisket gatha he ornamentchou belek, hag en dro dezha ar veleien hag al levided, a gerz beteg ar c'hoeur. Pevar levit a denn dirazha ar ridoch a ioa dirak an aoter ha Zakarias a ia var eeun beteg aoter ar c'huezmad. Eno, unan euz ar veleien a ioa assamez gatha a ginnigas dezha glaou ruz-tan en eur pod aour a lakeas var greiz an aoter. Ar belek koz a gemeras eur grabanad ezans hag he zaolas var an tan. Neuze beleien ha levided a dechas kuit. Zakarias a deuas ive eun nebeud kamejou a-dreñ hag a stouas dirak Jehovah epad ma pigne-moged an ezans varzu an env evel eur goabrennik a c'hoez-mad.

Neuze, e unan e c'harz treid Jehovah, e sonj er reuziou a zo en hem gavet gat he bobl hag, en hano ar Juzevien fidel da Zoue, e lavar ar beden kustum : « Doue Israël, saveteit ho pobl ! Hastit digass d'eomp an Hini o c'heus promettet d'hon tadou. »

Etretant, al levided a gane en dianveaz salmou an abardaez, hag ar bobl, guella ma c'helle, a gasse ive he beden varzu Doue.

Setu ma c'hoarvez da Zakarias sevel eun nebeud he benn, hag en tu deou d'an aoter aour, e vel eun eal euz an Eñv. Pell braz a ioa ne zigasse mui an Aotrou da vugale Juda kannaded euz an Eñv. Zakarias a jommas sebezet ha ne oa ket zo-ken eb enkrezen.

Mez an eal pa velas he spount a lavaraz dezha :

« No pezet ket aoun. Zakarias ; me ne doun ket eur c'hannad a gelou fall. Deuetoun ama da lavaret deoc'h eo selaouet ho peden. »

Ha goude m'hen doa lavaret ar c'homzou mad-sevit hen tenna a boan, e lavar :

« Ho pried Elisabeth a roi deoc'h eur map hag e c'hanvoc'h anezha Iann. Evidoc'h e vezo laouenidigez ho kozni hag an deiz ma c'hano a vezo evit an holl eun deiz a levenez. Braz e vezo dirak Doue : ne evo na guin na nep evach euz ar re a elfe mezvi. Leun e vezo euz ar Spered Santel, araok memez ma vezo ganet. Galvet eo da zistrei bugale Israël varzu an Aotrou, ho Doue, da lakaat ar peoc'h etre an tadou hag ar vugale, da ziarben ar re zifeiz a gerz dre an hent fall ha da brepar da Jehovah eur bobl dibab. Speret ha furnez Elias a vezo gatha, hag hen eo a deu da zigeri an hent d'ar Messias. »

An eal ne lavaraz ger goudeze. Ar belek santel a ioa mantret. Poan hen doa e kredi ar pez en devoa klevet. Tost eo eta da zont an Hini a dle delivra Israël ! Pobl Doue, kouezet ken izel, a zavo adarre en he za ha map Zakarias eo an hini a zigoro hent dezha. Eal Doue eo en deus her lavaret ; hag her lavaret hen deus dre gomzou ar profed Malakii, pemp kant vloaz araok. Mez, gouskoude, ive, penaoz e tenno da vir antraou kaer-ze promettet ? — Sevel a reas e spered Zakarias evel eun douetans distar ha ne c'hellas ket miret da lavaret d'an eal :

« Me a zo koz, emezha, ha va fried a zo ive var an diskar. Epe fessoun e c'hellimp-ni anaout e seveno ar pez a livirit d'eomp ? »

« Gouezid er-vad, a lavar neuze eal Doue, eo me Gabriel, unan euz ar seiz spered a vez bepred dirak tron an Aotrou Doue. Jehovah, he unan, eo hen deus va digasset ama da rei d'eoc'h ar c'helou kaerze. C'hui a fell deoc'h kaout eur merk e z'eo guir va c'homzou. Setu-hen ama. — Abalamour n'oc'h euz ket kredet dioc'h-tu va c'homzou, e chommoc'h

mut, eb gelloud lavaret eur ger, ken na vezo deuet da veza guir ar pezh am eus lavaret d'eoc'h. »

Kerkent, an eal a dec'has, ha Zakarias a jommas he unan dirak an Aoter.

Gouskoude ar bobl, mall gatha distrei d'ar gear, a ioa estounet e chomje ar belek koz keit-se el leac'h Santel. Rak ar belek ne dlíe ket dale eno, nemed an amzer red evit kinnig an ezans da Zoue. Edo var nez kaout eun nebeud aoun, pa veljot ar ridoch e tigeri ha Zakarias e tont er meaz. Tress eun den strafillet a ioa varnha, hag ive evel tress eun den leun a joa. An dud a iegas d'an daoulin ervez m'oant kustum. Zakarias a zavas he zaouarn evit rei he vennoz. Hogen gullet a reat er-vad ne lavare ket eur gomz euz ar re a ioa merket el leor. Peruvia e vije lavaret : « Plijet gat an Aotrou ho pen-niga hag ho tiouall mad ! Plijet gat Jehovah sellet a druez ouzoc'h ha rei d'eoc'h ar peoc'h ! »

An dud a ioa daoulinet. Bennoz ar belek koz a guezas varnho ; mez ne ellas ket lavaret eur ger. Poania'reas da zeski dezho dre jestou, dre zimiliou, ar pezh en doa gullet ha klevet ha perak oa deuet mut.

Holl gomzou an eal a dennas da vir. Raktal m'oue tremenet evit Zakarias al loden amzer a dlíe da dremen en templ, e tistroas d'he veneziou benniget, d'he di sioul Hebron. Evel hen devoa lavaret, Elisabeth a gonsevas en he c'hozni. Epad pemp miz e talc'has, evel e-kuz, ar joa hag an enor great dezhi gat Doue, ha noz-deiz hen trugarekea da veza bet kement a drugarez evithi ha da veza tennet divarnhi an dizenor da veza dizher e kreiz ar bobl a Israël.

Pa ziouezas an heur, e lakeas he c'hrouadur er

bed, eur potr, evel m'en doa lavaret an eal. Kalz levenez oue dre ar vro. Kerent, mignouned, amezien, a deuas da zaludi ar-vam eurus ha da gemeret perzh en he joa.

Eiz dervez goude m'oa ganet, e tlie ar c'hrouadur beza sirkonsizet. Ar gerent a deuas d'ar gouel-ze hag a zivizas entrezo pe hano a vije roet d'ar potr. An holl gerent a felle dezho e vije hanvet Zakarias evel he dad ; hogen, Elisabeth, abalamour e doa klevet komzou an eal, a zalc'he mad a eneb dezho hag a lavaras grounds :

« Nan : ne vezo ket hanvet Zakarias ; hogen *Iann* a vezo he hano. »

Ar gerent a ioa drouk-kountant hag a c'hros-mole abalamour, emezho, n'oa den ebed euz an hano-ze en ho famill. Elisabeth n'ho zelaoue ket.

Neuze, e kafehont mad goulén kuzul an tad. Ar belek koz, chommet mut abaoe an templ, pa oue goulennet outha pe hano rei d'he grouadur, a c'hou-lennas he damm sklent ha varnezha e skrivas ar peder gomz-ma :

Iann eo he hano

Pa glevont an traou-ze, an dud a jomm mantret. Hogen, souezetoc'h ouent c'hoas pa glevhont e komz Zakarias, mut abaoe nao miz. He deod a ioa ken distagel hag he galoun ken tom ha ker leun a anaoudegez vad evit he Zoue, ma lavar ar c'hantik kaer-ma dirak ar bobl a Israël :

« Benniget ra vezo an Aotrou, benniget ra vezo Doue Israël abalamour m'hen deus prijiet dont da velet ha da zavetei he bobl. Euz a lignez David e tenno evit hor silvidigez he vap muia karet, ervez

ar bromessa great euz an eil kantved d'egile dre c'hinou ar brofeted. Hennez a dle hon tenna euz a-dre daouarn hon inimied ha kement re o deus kas-souni ouzomp.

« N'hen deus ket ankounac'heat an allians great guechall, nak ar bromessa great dre le d'hon tad Abraham, d'en hem rei d'eomp he unan, evit ma c'hellimp neuze libr ha dizoursi, kerzet dirazha, bemdez e doug hor buez, dre hent al lealded hag ar zantelez. »

Bete neuze belek Jehovah a ioa tro he zonj varzu hor Zalver ebken. Mez pa zioues dezha guelet he vap, bugel a virakl, e kouez varnha evel eur bann sklerijen euz an Eñv, guelet a ra an amzer dazont hag e lavar en eur grena :

« Ha c'hui, bugel bihan; c'hui'vezo hanvet profed an Holl Galloudek. C'hui a ielo araok ar zalver da zigeri dezha hent. C'hui a zesko d'an holl skiant ar zent hag ar pardon a zigoro Doue d'ar pec'her, en tenzoriou euz he drugarez. Guelet a ran dija an Heol divine tisken euz barr an Envou evit rei sklerijen d'ar re a zo azezet en denvalijen hag e skeud ar maro, evit ober d'eomp kerzet dre hent ar peoc'h. »

An hini koz a baouezas da gomz. An holl dud a ioa en dro dezha a ioa evel spountet. Mont a reont d'ar gear en eur zonjal ennhio ho unan er pez o devoa guelet ha klevet. Ar brud euz ar burzudou-ze a ieas buhan er broiou tro-var-dro hag ar bastored, e kreiz menezioù Juda, a lavare an eil d'egile : « Petra'zonjit euz ar bugel-ze ? Petra, gredit e vezo eun deiz ? » Hag holl e kredent stard oa traou braz e vont da erruout hag emedo Jehovah e vont da zavetei he bobl.

Evit ar c'hrouadur mirakulus, oa sklear aouala-c'h edo Doue ouz he hentcha. Dre ma kreske he oad, e kreske ive he spered. Kerkent a ma ellas diouered d'he vam, e tec'has euz a douez an dud evit mont da veva e kreiz argouelec'h. Eno e chommas kuzet, anavezet gat Doue ebken, da c'hortoz an deiz merket dezha evit mont da brezek ar Messias da vugale Israël.





II.

MAM HA GUERC'HES.

En amzer-ze, e veve e Nazareth, keriaden euz ar Galilee, eur plac'h iaouank euz a dribu Juda, kar-tost da Elizabeth ha da Zakarias, priedou santel Hebron. Mari oa he hano.

Nebeud oa anavezet. Gouzoud a reat gouskoude e tiskenne euz eul lignez huel, daoust m'he devoa eun doare dister ha modest. Joachim, he zad, a ziskenne euz a lignez ar roue David, hag Anna, he mam, euz a famill Aaron.

Pa oue diškaret divar an tron ar rouanez euz ho famill, mistri nevez Juda a ouall-gassas ho bugale evel enebourien danjeruz. Red oue dezho tec'het ha klask korniou distro, evit beva eno sioul hag e peoc'h. Guella a gavent evit en hem zioual ouz enklask ar roue kizidik Herodes, oa traoñiennou gouez ar Galilee. Anna ha Joachim a ioa deuet da Nazareth. Beva'reant eno dioc'h ho loened, ha petra bennak n'oant ket pinvidik e kavent gouskoude an tuda rei aluzen ha da ginnig da Zoue e sakrifiks meur a loan a-ed ar bloaz.

Jehovah a jommas pell amzer araok benniga ar

c'houbl santel-ma. Kaer e devoa Anna, evel guechall mam Samuel, goulenn digat Doue ma tenno divarnhi ar vez da jomm eb bugale, kaer en doa ive Joachim pedi dioc'h he gostez, ne oant ket bet c'hoas selaouet. Setu m'en hem jalent o daou hag avechou en hem gemerent evel tud dilezet gat Doue ha great evit beza dispriet gat an holl.

Hogen fasia'reant, ha kals zo-ken. Rak abalamour ma zoant santel, Doue a reas evitho eur mirakl euz ar re vrassa. D'an ampoent ma n'oant ket mui var c'hed, Doue, en he drugarez, a roas dezo eur verc'h ag a dlïe beza da-viken gloar hag enor Israël.

Doue en devoa, a bep amzer, merket plass ar grouadurez benniget-se, a-zioud an holl grouadurien all; a-zioud ar rouanez ha rouanezed a dlïe, euz an eil kanved d'egile, azeza var an tron; a-zioud an holl zent euz ar baradoz, ha zo-ken a-zioud an Elez hag an Arc'helez a zo en dro d'he dron skeduz. Eva, e baradoz an douar, ne zeblante ket dezha ker pur; Esther n'oa ket ker mad na Judith ker krenv ha ken dispount. Dirak Mari an holl grouadurien all n'oant nemed skeudennou dister.

Doue, pa roas dezhi ar vuez, a reas evithi ar pezh n'hen doa great evit nikun euz bugale Eva. Petra bennak ma tiskenne euz eur chichen ag a ioa bet sotret er penn-kenta dre ar pec'hed, Doue a fellas dezha e vije bepred dinam hag evit an dro genta abaoue m'oa koezet Adam hag Eva, an Elez euz ar barados a velas e lugerni var an douar-ma eur grouadurez dibec'h ha dinam. Henvel oa ouz Arc'h Noe a ioa chommet eb goeledi e kreiz barrou dour an diluj; ouz ar Voden burzudus a velas Moizes,

tan tro-var-dro dezhi ha gouskoude ne zeve ket; ouz eur jardin klozet mad a ne vezo an or varnhi sotret gat den. Setu perak e tiroljont da gana var eur vouez. « Piou eta eo ar vaouez-se, koant evel an heol, kaer evel al loar? Merc'h muia karet an Aotrou Doue, c'hui e guirionez, a zo holl-santel, holl dinam! »

Ouspenn m'en doa Doue miret anezhi diouz peb pec'het, e roas dezhi c'hoas kement a zantelez, ma ne elfet ket, goude Doue, kaout netra ker santel ag hi. Eun templ santel eo, kaerroc'h eget-hini Jerusalem. Rak leun eo a c'hrassou Doue hag a c'hloar Jehovah. Ar stered a denvala pa zao an heol. Evel-se, ive, an holl eneou, an holl elez zo-ken euz ar barados a gollas ho sked pa zavas ar verelaouen nevez-se.

Anna ha Joachim a zigemeras gat joa ar c'hrouadur misteriuz-se, a vezo divezatoc'h ker meulet dre ar bed. Daoust dezho ne ouient ket petra oa an tenzor-ze fiziet enno gat Doue, ne zalejont ket gouskoude da velet n'oa ket henvel ouz ar vugale all. Ne ouie ket c'hoas parlant, ha dija neuze ne rea netra nemed gat furnez ha morse ne oue goelet en he doare netra direiz, evel a deu da heul ar pec'hed orijinel. Mantret o velet en ho merc'h kement a skiant, ha leun a anaoudegez vad evit ho Doue, e prometont he c'honsakri d'he zervich en templ, kerkent a ma c'helje dioueret euz he mam.

Setu hi eta, pa zao deuet ar verc'h d'he zrede bloas, a gass anezhi da Jerusalem evit he c'hinnig da Zoue hag e zewel eno, ervez ho vou, e skeud an aoteriou sakr.

He dournik e dourn he mam, e pign laouen dele-

ziou an templ santel. Mall eo gathi beza e ti an Aotrou Doue; e ti an Doue-ze a garkement ma laka he hano ebken he c'haloun da dridal. Eno, tost d'an aoteriou, e kreiz eun niver a verc'hedigou fur a Israël, kenteliet gat beleien an Aotrou, e velas e tremen, re vuhan, siouaz!, blavezioz kaer he bugaleach. He labour, bemdez, oa deski al leoriou sakr, ober guiskamantchou evit servich an templ ha kana meuleudioz da Jehovah. Aliez, tro varzu al leac'h santela, en hem lakea da gana salmou kaer ar roue David ha gat eur garantez birvidik e lavare : « O va Doue ! peger kaer eo ho tabernaklou ! Eun dervez ebken en ho kichen a dal muoc'h eget mil tremenet dindan teltou ar bec'herien ! »

Pa deue heur ar sakrifis, e vele an aoter euz he flass; hag epad ma vije ar belek o laza al loan, e pede kalounek an Aotrou da gemeret ar goad-se evel pinijen ha silvidigez ar bobl ha da zigass ar Zalver promettet d'he zadou. He brassa c'hoant oa he velet hag enori ar c'hreg benniget a dlhe her lakaat er bed. N'oa ket evel ar merc'hed all euz he bro. Ar re-ma holl a c'houlenne beza mam d'ar Messias. Hogen Mari ne glaske ket eun henvlelep enor : ar pezh a c'houlenne oa guelelet gat he daoulagat ar Messias, ha gat he muzellou poket d'he dreid sakr. Pell dioc'h goulenn an enor-ze, e reas, eun deiz, veu da jomm bepred guerc'hez. Ne fell dezhi kaout ken pried nemed Doue.

Gouskoude, pa deuas da blac'h iaouank, oue red dezhi kuitaat an templ ha distrei d'ar gear, da Nazareth. Tostik oa neuze d'he fevarzek vloas. He zad hag he mam a ioa maro. Emzivad oa, e unan, eb skoazel na sikour. He c'herent, evel Elisabeth

ha Zakarias, he alias da zemezi da eun den euz he famill, hervez m'oa merket el lezen. Evel ma zoa pennherez, e tlie kemeret evit pried he c'har tosta, evit derc'hel an danvez er famill. Den ne ouie ar veu e devoa great. Mari ne lavaras netra ken nebeud. Mes lakaat a rea he fizians en Himi en devoa he c'helennet bete neuze hag a lavare dezhi en he c'haloun mont araok.

Ar goaz a deuas d'he goulén a ioa he hano Joseph. Evel-dhi, e tiskenne euz a famill ar roue David hag euz an eil tad koz d'egile e pigne bete Abraham. Kaer oa eta dre he dud koz; mez kaeroc'h oa c'hoas dre he vuez santel. Evel Job, e zoa eun den just hag a zoujans Doue. Paour oa, nebeud anavezet, evel Mari he unan. Kalvez oa euz he vicher ha gounid a rea he vara gat ar c'huezen euz he dal.

Doue ne c'hortoze nemed an demezi-ze evit lakaat da zeveni ar bromessa hen devoa great, pevar mil bloaz a ioa. Eun abardaez, epad ma oa sioul ar bed, guerc'hez Nazareth a ioa var he daoulin en he c'hamprík dister, ha pedi a rea a greiz he c'haloun. Raktal setu eur sklerijen vraz diskennet euz an Env tro-var-dro dezhi ha maez distroet dioc'h he feden. Trei a ra he fenn, hag e vel eun eal en he za dirazhi, eun nebeud kamejou diouthi. Kannad braz Doue oa, an arc'hel Gabriel, ar memez hini a ioa bet kasset, pemp kant vloaz araok, da verka d'ar profed Daniel e pe vare e vije deuet ar Messias hag a ioa e paouez diskleria da Zakarias edo Iann erru da zigeri an hent dezha. An arc'hel a stouas dirak ar verc'hez hag a lavaras dezhi :

« Me ho salud, leun a c'hress; an Aotrou Doue

a zo ganeoc'h; benniget oc'h dreist an holl gragez. »

Mari a anavezas dioc'h-tu e zoa ar c'hannad-se eun eal. Setu perak ne gemeras ket a spount. Gouskoude e kave dezhi e roet dezhi kalz re a veuleudi, hag e chommas evel mantret. Komzou an eal he lakeas da ruzia. Mez hema a vel ar pez a dreimen en he ene hag a lavar dezhi gat dousder, en eur lavarret dezhi en dro-ma he hano :

« Mari, plijet oc'h da Zoue, ha setu e tigassan d'eoc'h ar c'helou-ma euz he berz. C'hui a gonsevo hag a lakai er bed eur map ag a hanvoc'h Jesus. Braz e vezo hag hanvet map an Doue a zo dreist an holl. Doue a roio dezha tron ar roue David, he dad koz, ha ren a rei var Jacob da-viken. »

Mari a iea mantret muioc'h mui dre ma kleve komzou an eal. Rak ker freaz ha ker sklear oant ma ne elle ket drouk-entent. Erru eo eta ar Roue promettet abaoe pevar mil bloaz. Ar Roue-ze oa map Doue he unan; hag ar map-se a dlíe beza ive he map. Pebez enor ! Mari a jomm evel strafillet. Goudeze, pa deu da zonj dezhi e deus great veu da jomm bepred guerc'hez, ne ell ket miret da lavarret d'an arc'hel :

« Penaoz e c'hoarvezo kement-se, pa zeo guir ne anavezan goaz ebed ? (Joseph ha Mari a veve evel breur ha c'hoar.) »

Kannad Doue a respountas :

« Ar Speret Santel a ziskenne varnoc'h ha nerz an Holl Galloudek, euz barr an Env, a c'holoio ac'hanoc'h gat he skeud. Setu perak ar frouez santel a c'hanoc'h, a vezo galvet map Doue. »

Mari a vezo mam hag a jommo guerc'nez. Mirakl var virakl eo, great gat Doue. Mez evit diskuez

peger bras eo he c'halloud, an eal a lavaras da Vari :

« Setu Elisabeth, ho kiniterv, e deus konsevet eur map en he c'hozni; ha c'huec'h miz a zo ema ar c'hreg-se dizher beteg hen, e tougen he bugel. Rak ne deus netra dreist galloud an Aotrou Doue. »

Ar verc'hez santel, daoulinet c'hoas, eb kaout an disterra-douetans var galloud an Aotrou, a lavaras kerkent.

« Servicherez oun da Zoue; ra vezo great d'in hervez ho ker. »

Kerkent, an arc'hel a ieas kuit ha map Doue a ziskenn euz an Envou-evit kemeret eur c'horv hag eun ene e kov ar verc'hez gloriuz Vari, konsevet eb pec'het.

Jesus eta, evel den, a zo bet furmet gat ar Spered-Santel euz a c'hoad pur ar verc'hez gloriuz Vari. Disken a rea dre-ze euz ar roue David, euz a Abraham, euz a Noë, euz a Adam, map da Zoue, dre ma en doa Doue he grouet.

Setu aze Jesus evel den. Mez evel Doue ha map da Zoue, e pe leac'h kaout komzou evit rei da anaout penaoz eo bet a bep amzer ganet gat Doue he dad? Doue ebken a c'helle hen deski d'eomp. Selaouomp ama he gomzou :

« A viskoaz hag araok peb amzer, edo ar Verb, hag ar Verb a ioa e Doue he dad. A viskoaz, Doue a lavare dezha : C'hui eo va map : Hirio, (da lavaret eo a bep eternite) oun deuet da veza ho tad. Beva'rea Doue evel an tad, morse krouet; mez diskenet euz an tad a viskoaz, Doue a Zoue, sklerijen euz ar sklerijen, guir Doue euz ar guir Doue. Ar verb a ioa Doue, parfet, infinit, a bepamzer, koulz ag an Tad hag ar Spered. »

Setu a-ze petra eo Verb Doue, an eil fersoun euz an dreinded sakr da behini ra vezo rentet enor ha gloar euz an eil kantved d'egile ! Ar Verb-se, en hem c'hreat den, eo map ar Verc'hez benniget.

O mister dudiuz ! Mister an inkarnasion a estoun an dud, an elez ha zo-ken Doue he unan. Abalamour da-ze biken ne vezo ankounac'heat an nozvez benniget-se m'oa diskenet map Doue e Nazareth. Teir guech bemdez, dioc'h ar mintin pa darz an deiz, da gresteiz, pa gemer ar micherour eun ehan, ha dioc'h an noz, pa guz an heol, ar c'hloc'h a zigasso da zonz da vugale an dud euz an nozvez mil guech benniget ma tiskennas ar Verb da jomme touez an dud. Neuze epad ma lavar d'ar bobl, er c'heriou ha var ar meaz, er menez hag en draonien : « *Map Doue'zo en hem c'hreat den*, peb hini a zaoulino, a blego he benn hag a adoro; ha peb hini a lavaro a greiz kaloun ha gant karantez : « Me ho salud, o Krist, o peuz prijet evit savetei an den disken e kov eur Verc'hez ! »

« Me ho salud, Mari, leun a c'hress; an Aotrou Doue'zo ganeoc'h ha benniget oc'h dreist an holl gragez ! »





III.

MARI HAG ELISABETH.

Piou a elfe biken lavaret ha zo-ken kompren peger braz oa joa ar Verc'hez Vari d'an deiziou kenta goude ma zoa diskennet ennhi Verb Doue. Hi, kezik emzivadez euz a Nazareth, a zo deuet en eun taol-kount da veza mam d'he Doue. Savet eo dreist ar rouanezed, an impalaerezed, ha memez dreist an holl brinsed, elez hag arc'helez euz ar baradoz. Gouzoud a rea gouskoude ne oa ket eun ure. Rak guelel a rea sklear al leac'h m'oa diskennet an eal en nozvez burzuduz. Ar c'homzou hen devoa lavaret a dinte c'hoas en he diskouarn hag an tan a garantez a zeve he c'haloun a ziskueze dezhi n'oa ket Doue a-bell, an Doue a garantez.

Seul-vui e troe ar sonjou-ze en he spered, seul-vui en hem gave dister dirak Doue, ha seulvui ive e trugarekea anezha euz an enor dispar a rea dezhi.

Mari a garje beza digoret he c'haloun dirak an holl grouadurien ha dikuezet dezho an tenzor a ioa eno kuzet, evit dougen an holl da gemeret perz en he joa. Mall oa gathi kaout unan bennak, mignoun,

kalounek hag a skiant vad, evit kounta he zekret hag he joa. Hogen, red oa gortoz ar poent merket gat Doue. An Hini en devoa great ennhi eur burzud ker braz oa ive an Hini a elle rei d'an dud skiant ha sklerijen aoualac'h evit kompren ar pezh en devoa great.

Kunduet gat ar Spered-Santel, a ioa bepred he sklerijen, e lakeas en he fenn mont da velet he c'hiniterv Elisabeth, benniget ive gat Doue ervez lavar an arc'hel. Abaoue maro ar c'hreg santel, Anna, Elisabeth a ioa bet evithi evel he mam. Eun dra zeread oa eta evithi mont d'he guelel, da gemeret perz en he joa ha d'he zikour da drugarekaat an Aotrou Doue. Tregont leo e doa da ober dre ar menezioù ha dezerzioù Juda. Mez ar garantez guirion ne anavez na poan na skuisder. Hag ouspenn-ze, daoust a Jesus n'edo ket gat Mari! ha Jesus eo a rea da Vari ober ar veaj hir-ze, eb dale.

D'ar mare-ze, e zea tud a vandenn da Jerusalem da dremen gouelioù Pask. Mari a ieas assamez gat eul loden a-dreuz ar Galilee ha torgennou Ephraïm. Ne reas nemed tremen dre Jerusalem, ar gear zantel, hag e kemeras hent Bethleem. A dreuz ar menezioù e kerzas, ha d'ar pemped dervez bale e velas Hebron, ar geraden goz en devoa an Aotrou Doue great ennhi kement a draou burzudus.

Zakarias hag Elisabeth a ioa eno e chomm, sioul ha didrouz. Abaoue m'en doa guelel an eal en templ, ar belek koz a ioa mut. Ne vele mui den, hag ed an amzer e troe he zonz var ar pezh a die Doue da ober euz ar c'hrouadur a zouge Elisabeth. Petra'vezo ar map-se? Houma, leun a joa, a lakea

he amzer da veuli Doue evit he drugarekaat euz an holl vadelez en devoa bet evithi.

Elisabeth n'oa ket var c'hed d'he c'hiniterv iaou-ank. Pa deuas Mari en ti, en eur lavaret ervez ar c'hustum : « Ra vezo Doue ganeoc'h ! » e seblantas dezhi klevet mouez eun eal. He mabika lammias en he c'hreiz, he galoun bar-leuni a joa. Elisabeth, skoliet gat Doue, a velas dioc'h-tu perak en devoa lammet ar c'hrouadur a zouge. Ar map-ze a ioa direbech, dibec'h, santel araok beza ganet, ervez m'en devoa an arc'hel lavaret da Zakarias. Ar Spered Santel a ioa diskennet enna ; tennet en doa divarnha ar pec'hed orijinel, her c'harget en doa a c'hraou hag ouspenn en doa roet dezha ar skiant pe uzaj a rezoun.

Iannik a ioa c'hoaz e leac'h tenval. Gouskoude, pa deuas Mari en ti, ar c'hrouadur benniget-se a roas da entent d'he vam oa diouezet en he zi mam Doue.

Elisabeth a zigemeras he c'hiniterv, ne ket evel eur vaouez dister, mez evel eur c'hreg euz ar re gaerra hag evel eur berlezen euz an Env.

Kerkent a ma vel anezhi e lamm da boket dezhi hag e lavar gat eur vouez karantezus :

« Benniget oc'h e touez an holl gragez, ha benniget eo ar frouez euz ho kov. »

Oh ! na kaerra komz deuet a-berz Doue evit meuleudi ar verc'hez Vari-Mam-Doue. Komz ag a vezo lavaret hag aslavaret bemdez gat an holl gristenien, beteg an amzeriou diveza.

Elisabeth a ioa he c'haloun leun a levenez en eur boket da Vari, ha pa zao en he spered ar zonj e zeo ken huel an hini a zo e c'houlén digathi lojeiz, ne c'hell ket miret da lavaret :

« Petra eo d'in-me kaout an eur-vad-ma, ma teu mam va Doue beteg ennhon ? O Mari ! Raktal ma meuz klevet ho mouez, ar c'hrouadur a zougan, en deus lammet em c'hreiz gat levenez. Euruz oc'h, Mari, da veza kredet ger evit ger komzou Doue. Rak ar pezh en deus lavaret a zioezzo. »

Bete neuze, guerc'hez pur ha santel Nazareth a ioa chommet sioul hag evel mantret, kement a viraklou a rea evithi an Aotrou Doue. Hogen, pa glev meuleudiou he c'hiniterv deuet euz a berz Jehovah ha sklerijennet he unan gat ar Spered-Santel e lavar ar c'hantik dudiuz-ma, a vezo kanet bepred gat karantez beteg an deiz diveza euz ar bed.

Magnificat. — « Va ene a rent mil meuleudi da Zoue, ha va c'haloun en deuz dridet gat ar joa o sonjal er pezh en deuz great evidon va Doue ha va Zalver.

« Rak pegen dister bennak ounn, eo plijet gantha sellet ouz he zervicherez, hag iviziken an eil rumm tud var lerc'h egile am galvo eüruz.

« Kalz burzudou en deus great em c'henver an Hini a zo holl-galloudek hag a zo santel he hano.

« Trugarezuz eo a bep amzer evit ar re o deus doujans evitha.

« Dispaket en deus an nerz euz he zivrec'h ha kasset da netra sonjou an dud ourgouilluz.

« Tud a c'halloud en deus diskaret divar ho zron ; ha tud a netra en deus savet huel.

« A vadou en deus karget ar re a ioa en dienez, ha lezet an dud pinvidik goullou ho daouarn. »

Mari a zeblante dezhi guelet e tremen dirazhi, pilet gat eur c'hozaden a Zoue, ar re a ioa bet e ouall-gass Israel, Pharaon, Holofernes, Nabukodo-

nosor, Antiokus... Guelet a rea ive ar c'heaz pobl-ze dalc'h-mad skoet gat Doue, hogen ive savet bep-tro en he za gat he zourn trugarezuz. Goude eur zell great var an amzer dremenet, e sell ive ouz an amzer da zont. Dont a ra da zonz dezhi e toug an Hini a dle beza redamptor Israël, hag e lavar gat levenez :

« Kemeret en deus, dre drugarez, ar bopl a Israël evit he vugale, ervez ar bromessa en doa great d'hon tud koz, da Abraham ha d'he holl vugale var he lerc'h. »

Setu ar c'hantik a ganas guerc'hez Nazareth, kantik a veuleudi da Zoue evit ar burzudou a rea evithi.

Evelse e tlie kana guechall an Elez, er baradoz, kenta tro ma veljont an Holl-Galloudek.

Evelse e kane Adam hag Eva e baliou jardîn an douar pa valent peger kaer oa an Env hag an douar.

Evelse e tle kana ive, bep abardaez, an ene santel prenet gat goad Jezus-Krist, pa deu da zonz dezhi euz a garantez bugel Bethleem, map da Vari.

Kredi a rear e chommas ar Verc'hez tri miz c'hoaz e ti he c'hiniterv. E doug an amzer-ze, euz a betra e komzent nemed euz ho c'harantez hag ho anaoudegez vad evit Doue. Buhan e tremenas an amzer-ze ha deuet oa ar mare evit Mari da zistrei da Nazareth.

Elisabeth ha Zakarias a skuillas kalz daêlou pa gimmiadas dioutho an hini a zouge en he c'hreiz an Doue a garent kement. Mari ive a ouele. An tri miz m'oa bet e ti Elisabeth a zeblante dezhi evel tri miz tremenet er baradoz hag eun dra bennak a lavare dezhi en he spered e tostea evithi amzer ar boan.



IV.

NEDELEK.

DA c'hortoz ar poent da lakaat er bed he map benniget, Mari a lenne hag a studie al leonriou sakr, ha dreist-holl ar c'henteliou a ioa menek enno euz ar Messias, euz an Hini a dlie savetei Israël. En ti paour a Nazareth oa plijet gat map Doue en hem ober den; mez e Bethleem Juda e tlie dont er bed. Ar profet Micheas en doa her lavaret seiz kant vloaz a ioa : « Bethleem Ephrata, emeza, te a zo bihanik e touez kerriou Juda, ha gouskoude ac'hanod e teui an Hini a vezo mestr var Israël, ar Roue a ziskenno euz an Env. » Setu perak, ato, ar veleien hag an doktored a zisklerie e tlie ar C'hrist genel e Bethleem, evel David, ar penn euz he lignez.

Hogen, penaoz e teui an traoz-ze da zeveni? Euz ar Galilee da vro Juda e zeus eur pennad mad a hent. Ouspen-ze, perak e tiblasfe Mari euz a Nazareth evit mont keit-all? N'he devoa ken c'hoant nemed ober bolontez Doue ha gortoz a rea, eb en hem jala, ma vije pliget gatha he c'helen. Ar Brovidans a reas peb tra evit ar guella.

D'ar poent-se, an Impalaer braz August a ioa mestr var ar bed-holl, koulz e tu ar Sao-heol hag

e tu ar C'huz-heol. Guelet a rea e soubla dirazha an holl rouanteleziou-ze a denne guechall kement a foug euz ho galloud hag euz ho finvidigez. An Itali, ar Spagn, an Afrik, ar Gres, an Ejipt, Broc'hall, Bro-zaoz, an Asii-vihan, a ioa great anezho evel ken aliez a zepartamant gouarnet gat prefeted kasset gat an Impalaer ha lakeat gatha da vistri varnho. Ar boblou, epad pell amzer, o doa kavet diez plega da dud estren. Mez nak an Numiid en tu-all d'ar mor doun, nak ar Jerman a dreñ he goajou tenval, nak ar Zaoz e kreiz ar mor, ne eljont stourm ouz armeou an Impalaer ha red oue dezho anzao oant kannet.

Goude kalz freuz ha kalz trouz, oa diazezet mad ar peoc'h ive e diabarz he rouantelez. An Impalaer a elle beza dispount. Ar re vraz a grene dirazha hag ar bobl her c'hemere evit he Roue, he Velekbraz hag he Zoue. Ne vanke dezha nak ilizou, nak aoteriou, na beleien. Savet oa goueliou en he henor, ha sakrifisou a vije kinniget dezha evel d'ar brassa euz an holl Doueou. Erfin, an den kriz-se a lakea he vrassa joa o velet bete dek mil sklav ec'h en hem laza dirazha, a ioa leshanvet gat ar bobl divez-se : « *Salver ar bed-holl.* »

Mad; d'ar poent ma tlie genel guir Zalver ar bed, an Hini a dlie diskar an doueou faoz ha kentelia ar rouanez, e savas c'hoant gat an Impalaer gouzoud, piz ha piz, peger ledan oa he rouantelez ha pegement a dud a ioa e chomm ennihi. Er blavez 746, e roas urz da zevel ar roll euz an holl dud a ioa e chomm en he stajou hag ive euz an dud a ioa e chomm er rouanteleziou a juje hag a bae kargou dezha.

Ar Judee a ioa unan euz ar rouanteleziou-ma. Rak Herodes n'oa chommet da roue nemed a-bouez stoui ha plega dirak August.

Tri bloas goude an urz douget gat an Impalaer, Sirinus, eil gouarner ar Sirii, a deuas er Palestiin da zigeri ar rollou. Kement den a ioa er vro-ze, pennou-tiegez, merc'hed ha bugale, a ranke dont da rei ho hano, ho oad; da ziskleria euz a be famill, a be tribu oant ha petra o devoa a zanzev. Dioc'h kement-se e tliet diazeza an taillou. Ouspenteze, red oa da bep hini mont da lakaat he hano, ne ket el leac'h ma edo e chomm, mez er gear m'oa ginidik anezhi he dud koz. Rak eno edo an titrou a gerentiaj hag a leveou.

Red oue eta da Joseph ha da Vari, ho daou euz tribu Juda hag euz lignez ar roue David, mont euz a Nazareth da Vethleem. Rak eno oa ganet ar roue David.

Dre ma kerze a-dreuz ar meneziou, Mari prest da veza mam, ne baoueze da veuli providans Doue a gasse anezhi evel dre virakl betek al leac'h merket gat ar profeted evit ginivelez ar Messias.

An daou veajour santel a erruas e Bethleem d'an abardaez, skuiz maro goude an diou leo var'n ugent o devoa great. An heol a guze var kear David, diazezet evel eur rouanez var gern eun duchen ha tro-ar-dro dezhi eur pallennad guiniennou ha guez olivez. Eno, guechall-goz, e veve ar plac'h koant Noemi, pa renkas, abalamour d'ar gernez, tec'het varzu bro Moab. Er meziou tosta, Ruth a iea da bennaoui varlerc'h eosterien Booz. En traoniennou divardro, David a ioa e tional he loened, pa gemennas dezha ar profed mont d'he gaout evit

beza sakret roue Israel. Dre ma zeant, e teue da zonzj en ho spered euz istor ho zud koz. Euz a diez kear, euz kern ar menez, euz goeled an draoñien e save moueziou betek ennhö ; hag ar moueziou-ze a gomze dezho euz ho zadou koz hag ispisial euz ar roue David, ar chichen euz ho lignez. Mez d'an amzer-ze, piou' anaveze guerc'hez Nazareth ha Joseph, ar c'halvez santel ?

Pa ziouezont e kear, e kavont ennhö eun niver a dud estren deuet ive da rei ho hano. Kaer o doa skei var an or da c'houlén lojeiz evit an noz, e nep leac'h ne gavont plass. Tud Bethleem a ioa leiz ho zi a gerent, a vignouned, a veajourien. No devoa ket a blass da rei d'an dud keiz-ma, deuet divezat hag a ioa varnho tress ar baourentez. Joseph ha Mari a ieas neuze betek an ostaliri publik, el leac'h ma chomme da ehana ar bandennajou beajourien. Hogen, eno ive oa kement a dud hag a loened ma né eljont ket kaout an disterra plass.

Doue e unan eo en doa merket ar plass evit lojeiz he vap. Evel ne gavent ket e kear eur mean zoken da harpa ho fenn outha, Joseph ha Mari a ieas er meaz euz a gear dre zor Hebron. N'oant ket eat pell dre an hent-se ma veljont eur c'havargn, eur c'hraou ag a deue ar bastored hag ho loened d'en hem repui ennhö. Eun tamm kolo a ioa ennhö hag eur vanjouer evit al loened. Mari a ioa skuiz gat he beaj hir ha poaniuz hag a azezas var eur mean braz.

Prestik goudeze an trouz a baoues : Kear a-bez a zo kousket ha sioul. Mari, ebken, a ioa dihun hag a ioa e pedi he Doue. Raktal, var dro an anter-nöz, ar Verb, great den, a deuas en eur fessoun

mirakulus euz ar Verc'hez, evel eur bann heol adreuz ar goabren. Mari her c'hemeraz gat levenez etre he divrec'h, a vailluras anezha, he stardas var he c'haloun ha goudeze e c'hastennas anezha var eun dournad kolo e kraou al loened. Euz ar c'hraouik-ze a ioa neuze he di hag he gavel, divar an tam kolo leiz-se, rust evit he vemprou delikat, ar map a lavare d'he dad pehini'zo en Env : « Ne ket fellet d'eoc'h euz a c'hoad ar bouc'hed hag an ounnered. Va lakeat o c'heus er c'horv-ma great gat ho taouarn oc'h unan : Setu me ama eta, o va Doue, evit ober bepred ho polontez. » Evel-se redamptor ar bed a ginnige d'he dad ar re genta euz he boaniou hag euz he drubuillou. Daoulinet dirazha, ho c'haloun e tridal gat ar joa, hag ho daoulagat leun a zaelou, Mari ha Joseph hen adore eb lavaret ger.

E doug an nozvez misteriu-ze, pastored a ioa e tioual ho loened en draoñien dosta. Evel ar bastored guechall, Abraham, Isaac ha Jakob hag ho zad David a ioa bet ive e tioual an denved el lec'h-chiou-ze, ar re-ma a gomze aliez entrezho euz ar burzudou merket gat Doue da ziouezout. Nak a vech, ho daoulagat tro varzu an eñv, e kreiz an noz sioul, e sonjent en Hini a ioa prometted dezho gat ar profeted evit dont d'ho delivra ? Ho c'haloun a lavare da Jehovah komzou David : « E maomp ama evel denved dianket : Deuit, Aotrou, deuit da glask ho servicherien ! » — An Hini a oar diskar an dud a fouge hag a ro he c'harrassou d'an dud distar ha mad ne lezas ket eb rekompans feiz ar bastored keiz-se. Souden eur sklerijen dudiuz a darzas en dro dezho hag eun eal a apparissas dirazho.

Spountet ha mantret int. Mez an eal ne zaleas ket d'ho zenna a boan :

« N'ho pezet nep aoun, emezha ; rak digass a ran d'eoc'h eur c'helou mad ag a roio kalz joa d'an holl bopl. Hirio, e kear David, e zeus ganet evidoc'h eur zalver. Ar C'hrist eo, an Aotrou e maoc'h var c'hortoz dezha. Setu ama ar merk evit he anaout : « Kaout a reoc'h eur bugel mailluret hag astennet en eur c'hraou. »

A veac'h m'en devoa an eal-ma perachuet he gomz, ma oue klevet eun niver braz a elez all e veuli Doue hag e kana holl assamez : « *Gloria in excelsis*. Gloar da Zoue, emezho, e barr an eñvou ha peoc'h, var an douar, d'an dud a volonteiz vad ! » Ar c'han a baouezas ; an elez a nijas kuit ; ar sklerijen a vougas. Ar bastored, chommet ho unan, a zo ker mantret ma ne lavaront ket zo-ken eur gomz. Abalafin gouskoude, e lavaront an eil d'egile : « Deomp da Vethleem ha guelomp gat hon daoulagat ar burzud kaer diouezet eno, hervez komz kannaded Doue. » Mont a rejont eta diere d'ar c'hraou. Eno e kasc'hont Joseph ha Mari hag ar bugel astennet var ar c'holo. Pa veljont ar maillurou hag ar c'holo, e c'hanavezion edo eno hor Zalver. Kueza' reont d'an daoulin hag he drugarekaat a reont da veza ho galvet gat ar re genta da zont d'he adori.

Saludi a rejont Mari, ar vamm eüruz. Houma a glevas gat joa ha ne aukounac'heas morse ar pez o devoa kountet ar bastored divar benn Jesus. Neuze ar re-ma a gimmiadas dioutho hag a zistroas varzu ho loened en eur rei gloar ha meuleudi da Zoue. Eb dale e lavarjont d'ho c'henvrois ar pez

o devoa gullet ha klevet ha dre menezioù Juda e klevet eun ekleo dudiuz euz a gomzou an Elez : *Gloar da Zoue e barr an Env*. Abaoue an amzerze, pa deu, bep bloas, noz Nedelek, noz kaer ha santel dreist an holl nozvezioù-all, euz an eil penn d'egile d'ar bed, bras ha bihan, ar gristenien a gan a greiz kaloun : *Gloria in excelsis Deo*.

Setu penaoz eo ganet hor Zalver Jezus-Krist pevar mil nemed pevar bloaz goude ma oue krouet ar bed. Rom a ioa savet abaoe 749 vloas. Daou-ugent vloas a ioa edo August var an tron ha c'huec'h vloaz ha tregont m'edo Herodes e c'houarn ar Judee.

Pegen estounet ne vije ket bet an Impalaer bras ma vije bet diskleriet dezha neuze oa nevez ganet eur bugel hag a vije kaerroc'h he hano eget he hini ; e vije douget muioc'h a respet evit kraou Bethleem eget evit he balez ; e vije astennet kalz pelloc'h, ha padet kalz muioc'h rouantelezh ar c'hrouadurik-se ganet er baourentez eget he hini, hag e vije kountet ar blavezioù iviziken, ne ket euz ar blavez m'oa savet Rom, mez euz an hini m'oa ganet hor Zalver Jezus-Krist !! Ha kement-se a zo c'hoarvezet.





V.

ROUANEZ AR SAO-HEOL.

Eiz dervez goude ma oa ganet, ar c'hrouadur oue sirkonsizet e kraouik Bethleem. Joseph a lavaras ar c'homzou merket el leoriou sakr : « Meulet ra vezo hon Doue, a zo plijet gatha lakaat e kig ha kroc'hen he vugale ar merk euz he alians, evit m'o devezo divezatoc'h perz e bennoziou Abraham, hon tad. » Map Mari a deue evel-se da veza map Abraham, hag ar patriarch santel a c'helle anaout oa ennez map ar bromessa, an Hini en devoa Doue lavaret anezha daou vil bloaz a ioa : « Eur map a roin d'eoc'h hag er map-se e vezo benniget an holl boblou euz an douar. »

Da zeiz ar sirkonsizion, ar gerent a roe eun hano d'ar bugel nevez-ganet : « Doue hon tadou koz, a lavarent-hi, diouallit ha krevait ar c'hraouadur-ma ha grit ma vezo henoret he hano e touez bugale Israël. » D'ar mabik ganet er c'hraou, oue roet an hano misteriuz en devoa digasset an Eal euz an Env da Joseph ha da Vari, hano ag a verke ar pezh oa deuet da ober var an douar : hanvet oue *Jesus*, da lavaret eo salver, hano mil guech benniget euz an eil kantved d'egile ; hano douss d'an teod evel

ar mel ; eur muzik evit ar skouarn, hag evit ar galoun eun tanva euz ar baradoz ; hano santel dreist an holl hanoiou hag a laka peb tra da zaoulina en Env, var an douar hag en iverniou !

Epad ma read ar seremoni-ze, sioul ha didrouz er c'hraou, edot ive er broiou a-bell var c'hed d'ar Bugel-Roue. En tu all da vro Israël, er broiou-ze ker frank oa bet guechall hon tadou koz e chomm enno, edo brema ar C'haldeaned, desket dioc'h ar stered, ar Persed a adore an heol hag an Arabed a iea euz an eil gouelec'h d'egile. Ar re-ze a c'hortoze ar Messias. Epad m'edo an Hebreed, pemp kant vloaz araok, e sklavaj var ribl an Euphrat, ar baianed-ma o devoa gellet koumz outho euz ho relijion, lenn zo-ken leor ar profed ha deski eun dra bennak divar benn an amzeriou da zont. Gouzout a reant e vije merket ginivelez ar Messias, dre eur sin bennak en env. Rak en amzer Moizes, eur profed en devoa lavaret da vugale Israël : « Her guelet a ran, mez n'ema ket c'hoas. Her guelet a ran sklear ; mez n'ema ket var nez apparissa c'hoaz. Eur stereden a zavo skeduz var Jacob ; eur oualen-roue a zavo euz a Israël. »

An dud desket euz ar vro-ze ne ehanent da studia ar stered dudiuz-se a deu hag a ia a-zioud hor penn evit deski dreizho, var ho meno, ar pezh a ioa da erruout. Eur vech, tri euz ar rouanez bihan-ze, hanvet maj, a ioa ec'h evessaat oc'h bolz an Env. Sellet a reant oc'h doare ar stered-se a anavezent dre ho hano, kerkoulz a ma c'hanavez ar jardiner ar bokedou a vez e toura bep mintin. Setu, o tra burzuduz ! ma velont eur stereden nevez, kalz brasoc'h ha mil guech skedussoc'h eget ar re-all. Er

memez amzer eur vouez a lavar dezho en ho c'h-loun : « Ennez eo merk ar Roue braz, » hag en hem zantent evel douget en despet dezho den hem lakaat en hent evit mont d'her c'h-lask. Eun tam diegi o devoa e tiblass. Mez ar stereden gat ar mor a sklerijen a gasse beteg ennhio a zeblante lavaret dezho : « Deuit d'am heul, me ho c'hentcho. »

Senti a reont ouz grass an Aotrou Doue ha setu-hi, ho zri, er penn-kenta euz an hent eb gouzoud e pe leac'h e vezo ar penn diveza. Kemeret a reont prezantchou kaer hag e pignont var ho dremedaled gat ho zervichourien, ho lagad tro atao etrezek ar stereden. Epad pell amzer en deus an dremedal diere pigosset treaz er gouelec'h ; ar stereden a iea atao. Abalafin, e tioueziont var ribl ar Jourden ha goudeze var ar menez olivet, a fass d'ar gear zantel, Jerusalem.

Pa velont ar gear vraz hag an templ ker brudet : « Ama ema kear ar Roue braz », a lavarent an eil d'egile. Pa zavont ho daoulagad varzu an Env, e velont eo tec'het kuit ar stereden. A dra-zur, e tleont beza erruet e penn ho felerinaj. Diskenn a reont eta e kear hag e zeo mall gatho goulen digant an dud a gavont. « E pe leac'h ema roue ar Juzevien nevez-ganet. »

Mez an dud se, braz ha bihan a jomme sebezet ha mantret hag a' respounte holl edo Herodes roue ar Juzevien ha n'o doa ket klevet menek euz eur roue nevez.

« Gouskoude, eme an tri veajour, ni or beus guelet he stereden e bro ar Sao-heol hag oump deuet ama d'he adori. »

Goassoc'h souezet eget biskoaz, ar Juzevien a

zelle an eil ouz egile hag a lavare holl n'o doa ket guelet ar stereden a gomze anezhi an dud dianveaz-se. Euz-a bep korn e tirede tud da velet rouanez ar Sao-heol, ha kement a freuz a oue kear ma zeas ar brud beteg ar roue Herodes. Pa glevas lavaret oa ganet eur roue nevez, en hem lakeas da grena e goueled he balez. Petra ve ar roue-ze ? Daoust ag unan bennak a ve bet chommet euz a ouenn ar Makabeed ? Daoust c'hoas hag hen a ve ar Messias gortozet gat ar bobl evel he Zalver ? Ne bad ket mui. Rei a ra urz d'ar c'honseil braz da zont raktal d'he balez.

« Guelomp, emezha ; ervez ho leoriou, e pe leac'h e tle genel ar C'hrist, e maoc'h var c'hortoz dezha ? » « E Bethleem Juda, a lavarjont holl raktal, var eur vouez. Evelse eo merket gat ar profed Mikeas. »

Herodes a ioa joa gatha gouzoud e pe leac'h e c'helje kaout an adversour iaouank-se. Goude beza ali prinsed ar veleien hag an doktored euz al lezen, e fellas dezha komz he unan gat an tri beajour a roe dezha dre ho c'homzou kement a enkrez. Lakaat a reas ho digass dre guz en he balez hag eno e c'houlennas digatho da be vare just oa apparisset dezho ar stereden. Goulenn a reas c'hoas kement a elle rei dezha da anaoud oad ar c'hrouadur. Ha neuze evel pa vije leun a zevosion evitha, e lavar var dezho gat eur vouez flour :

« Iit da Vethleem : Eno eo her c'havoc'h. Klas-kit-hen mad, ha goude ma vezoc'h bet daoulinet e c'harz he dreid, distroit ama da rei kelou d'in evit ma zin d'am zro d'he adori. »

Adalek ar moment-se, Herodes en deus barnet ar c'hrouadurik-se d'ar maro. Gouskoude, gat

aoun da lakaat ar Juzevien e kounnar, e sonjas en hem zizober anezha eb trouz. Boazet oa dioc'h ar seurt torfejou-ze. Nebeud blavezioù araok en doa lakeat beuzi he vreur kaer Aristobul, hag evit kuzet he dro e viskas dillad kaoñ, evel p'en dije bet kalz keuz d'he vreur.

An tri roue ne ellent gullet ar pez a ioa e kaloun Herodes. Leun a fizians en he gomzou, e kemeront dioc'h-tu hent Bethléem; ha mad a rejont; rak d'an ampoent m'oant e vont er meaz euz a Jerusalem, ar stereden burzudus a apparissas dezho adarre. Evel e gouelec'hiou ar Sao-Heol, e kerz dirazho hag ho c'hass etrezek kear ar roue David.

An tri estranjour evel er meaz anezho ho unan gat ar joa o velet ar stereden, ho mignoun, a iea d'he heul en eur veuli an Aotrou.

Setu ma chomm ar stereden a-za. Eur sklerijen vraz a gass varzu eur c'hornik ebken hag e seblante lavaret: « A-ze ema an Hini a glaskit. » Hogen ne velent dirazho na templ, na palez, na telt pinvidik; netra nemed eur c'havarn toullet er roc'h. Mont a rejont ennha evelato. Eul lamprik tenva a roe d'ar c'hraou anter sklerijen. Eur c'hreg a ioa gathi eur bugel bihan var he divrec'h; eur goaz a ioa e kichen, sioul, beuzet er joa dirak an daou grouadur-ze da Zoue, a zeblante dezha beza kentoc'h euz an Env eget euz an douar.

An tri beajour ne jomjont ket pell da zellet ouz an tri zen santel-ze, ma santchont evel eun eulven euz an Env diskennet en ho ene. Seblantout a ra dezho gullet ar c'hraou leun euz eur sklerijen du-diuz, ha dindan maillurou paour ar bugel e c'hana-vezont ar Verb en hem c'hreat den. An dour a deu

en ho daoulagad; kuezal'reont d'an daoulin evit he adori. Rouanez houan ec'h anavezont anezha evit ar roue ho mestr ha kinnig a reont dezha ho c'hurunen. Goudeze, pa o deus ar mevelien dizamet al loened, an tri maj a ginnig c'hoas dezha: aour, d'ar bugel-Roue; ezans, d'ar bugel-Doue ha myrrh d'ar bugel-Redamptor a dlíe gouzañ kement ha mervel evit silvidijeaz an holl boblou.

Setu a-ze penaoz oa diskuezet peger guir oa komzou ar brofeted: « Savit en ho sa, Jerusalem! Gloar an Aotrou a zo paret varnoc'h. Setu an holl broiou a glask ho sklerijen hag ar rouanez a glask ho c'heol skeduz. Gullet a reoc'h e tont ama eul leñon a ganvalet hag a dremdaleet euz Madian hag Ephra. Dont a reint euz Saba sammet a aour hag a ezans ha rouanez an Arabii a zigoro frank ho zenzorioù. » Adalek an dervez-se Jehovah n'eo ket mui Doue Israël ebken. Rak digass a ra e c'harz treid he vab ar Juzevien hag ar Jentiled, ar bastored euz a Vethleem hag ar rouanez euz tu ar Sao-heol. Ar rema a zante kement a laouenidigez en ho c'haloun ma karjent beza chommet eno pell c'hoas ha diegi o doa e tispertia diouz ho zri mignoun. Red oa gouskoude distrei d'ho bro. Ho zonz a reant da dremen dre Jerusalem evit kounta da Herodes ar pez o devoa desket var gount roue nevez ar Juzevien. Hogen Doue a ziskulias dezho epad ho c'houk an torfed en doa c'hoant Herodes da ober hag a roas urz dezho da zistrei d'ho bro dre eun hent all. Selaou a reont mouez an Aotrou hag e kemerjont e tu ar c'hreisteiz hent an Arabii. Ne ouent ket pell amzer evit mont er meaz bro ar Judea ha goudeze ezejont dre ar gouelec'h. Dre ma tremenent, e lavarent ar pez

o devoa guelet ha klevet en henvelep fessoun ma c'hellas tud ar Sao-heol koulz a tud meneziou Juda klevet ar c'helou kaer-ma : « Ar C'hrist a zo ganet ; hor rouanez o deus guelet he stereden hag a zo bet oc'h he adori. »



VI.

JESUS KASSET D'AN TEMPL.

GOUDE ma oa eat kuit an tri Roue, Joseph ha Mari a deuas da jomm en eun ti dister, e Bethleem, kear ar roue David. Ac'hano, d'an daou ugentved dervez goude ginivelez Jesus e zejont da Jerusalem evit heuill lezen Moïzes.

Doue en devoa lavaret da Voïzes : « Ar c'hreg e devezo bet eur map ne doucho oc'h netra santel ha ne dei ket en templ epad daou-ugent dervez. D'an daou-ugentved e kinnigo d'ar belek eun oan bloaz hag eun durzunel pe eun dube, e prof evit ar pe-c'hed. Ma nê ell ket kaout eun oan, e kinnigo diou zurzunel ha daou zube. Ar belek a bedo evithi hag e vezo purifiet. »

« Ouspenn-ze, a lavar an Aotrou, ar re genta ganet euz ho pugale a zo d'in-me ha me a fell e vent konsakret d'in. Ho asprena'reoc'h evit pemp sikl arc'hant, (vardro 8 lur). Ma c'houlén ho pugale diganeoc'h perak e ranker rei an arc'hant-se, c'hui a respunto : Jehovah en deus hon tennet euz a sklavaj an Ejipt en eur laza holl mipien hena an Ejiptianed. E memor euz hon delivrans, e konsacromp dezha ar c'henta ganet euz hor bugale. »

Setu a-ze, diou lezen douget gat Jehovah, hag

an holl mamou a dlie ho heuill. Gouskoude ne dizen ket Mari ha Jesus. Eaz eo gouzoud n'oa ket red en hem buriffa d'an hini e doa konsevet dre vertuz ar Spered-Santel hag e doa lakeat er bed an Doue a zantelez. Hag an Hini a ioa diskennet evit prena ar bed, n'en devoa ket izom he unan da veza prenet. Jehovah a lezas he zaou vuia-karet da veva dianavezet hag a zeske evel-se d'an dud pegement e tleont beza sentuz hag izel a galoun.

D'an deiz merket, ar famill santel a gemeras hent Jerusalem. Mari a zouge he map divin etre he divrec'h ha Joseph a iea a-dreñ, gat an offrans dister a dlie kinnig ar c'hreg paour. Goude eur pennad mad a vale, e c'hantreont e Jerusalem. Ar gear vraz-se a ioa didrouz ha sioul. Ar brinsed, ar veleien, an doktored ne deujont ket da zor kear da zigemer map Doue. An eal a ioa bet ekrec'hiennou Bethleem e c'hervel ar bastored, ne zisklerias ket mister ar Mabik-Doue d'an eneoù ourgouilluz-se ha douget d'ar blijadur.

Mari a iea etrezek an templ, el leac'h m'e doa tremenet he bugaleach o c'hervel hag o c'hortoz ar Zalver. Ha brema ar Messias-ze promettet abaoe pevar mil bloaz a bigne assamez gathi deleziou an templ kaer, en devoa ar profed Aggée komzet anezha pemp kant vloaz a ioa. D'ar poent-se, ar re a ioa chommet beo euz ar re a ioa bet e sklavaj e Babylon, distro d'ar gear, a glaske sevel ar gear hag an templ. An dud koz n'ellent ket miret da ouela pa deue da zont dezo peger kaer oa an templ koz. Hogen ar profed a lavaras dezo : « Ne ouelit ket, o bugale Israël ; mez kemerit kouraj. C'hoaz eun nebeud amzer, ag an Hini ema var c'hed dezha an

holl broiou a deuio en ti-ma ; ha gloar an templ a zavit brema a vezo treac'h da c'hloar an templ kenta. »

An deiz benniget-se a ioa goulouet. Sked hagloar ar C'hrist a sklerijenne ti an Aotrou Doue, daoust n'oa ket a dud er porchedou, na glevet ket kantikou santel al levited, daoust ma zoa doktored Jerusalem morgousket en denvalijen. Ama ive, evel er c'hraou, Doue n'en hem ziskuezas nemed da dud dister, izel a galon.

Neuze e veve e Jerusalem eun den oajet, eun hag a zoujans Doue, he hano Simeon. He vle a ioa guennet e servich Doue hag he lezen. Morse ne zavas en he spered an disterra disfizians euz promessaou Doue. Var c'hed edo ive d'an hini a dlie dont da gonsoli Israël, da zavetei ar bobl reuzeudik-se en devoa kement da c'houzañ er sklavaj ; mez ouspenn-ze, eur zont a leune he galoun a laouenidigez. Rak ar Spered-Santel en doa roet dezha da anaout ne vije ket marvet araok beza gullet ar Messias, promettet gat Jehovah.

Hogen en deiz-se, evel poulzet gat ar Spered-Santel, ar zant koz a iea d'an templ, d'an ampoent m'edo Mari ha Joseph e vont e-barz. Gullet a ra ar verc'hez humbl, he c'hrouadur gathi var he divrec'h. Trei a ra he zaoulagad var Jesus. Dont a ra an dour anezho gat ar joa hag he ene sklerijennet euz an Env a vel gloar Map Doue dindan ar spesou a zianveaz. Kemeret a ra ar c'hrouadur etre he zivrec'h ; her starda'ra var he galon ha gat he holl garantez e lavar dezha :

« Aotrou, dalc'het mad oc'h eus d'ho ker : va daoulagat o deus gullet ar Zalver. Brema ho ser-

vicher a c'hell mervel e peoc'h p'en deus bet an eur-vad da velet ar Zalver oc'h eus digasset var an douar evit beza sklerijen ha gloar Israël. »

Evel-se e komzas mignoun an Aotrou. Joseph ha Mari a dride ho c'haloun dre ma klevent ober meuleudiou ho c'hrouadur divin. Mez, setu penn Simeon e tevallaat ha traou glac'haruz a deu en he spered. Eur zell a ra c'hoaz oc'h Jesus hag e lavar goudeze d'he vam :

« Ar bugel-ma a vezo kirriek da galz a dud en Israël d'en hem goll pe d'en hem zavetei. Kaer en dezo ober miraklou, kalz cnebourien a en hein zavo outha ; ha c'hui, o mam, oc'h ene a vezo treuzet gat ar c'hleze ! » A dreuz ar c'homzou-ze, Mari a velas ar verzerenti a die beza divezatoc'h he lod. Evel deiz an Annonasion, Mari a respountas a greiz kaloun : « Bolontez Doue bezet great ! »

D'ar moment-se, e tiuezas eun test all c'hoas. Doue hen digasse evit anaoud he vab divin ha renta dezha gloar. Anna oa he hano, merc'h da Phanael, euz a dribu Aser. Chommet intañvez goude ar seiz vloaz e devoa tremenet gat he fried, ar c'hregse, oajet neuze a bevar bloas ha pevar-ugent, a veve er zantelezh ar vrassa. Tremen a rea he amzer e ti an Aotrou Doue, kastiza'rea he c'horv dre ar iun. Adalek sao-heol bete kuz-heol, ne baoueze da bedi dirak aoteriou an Aotrou. Kerkent a ma velas ar c'hrouadur, eur vouez a lavaras dezhi, en he c'halon, oa ennez ar Messias e devoa galvet ken alies a vech da zont er bed-ma. He ene a zirollas d'he veuli ha d'he drugarekaat ; ha dirak an holl e rente testeni oa ennez Jesus, an hini a c'hortozent evit prena ar bed.

Mari a ieas neuze en templ, beteg al leac'h ma oa plass ar Juzevien. Eur belek a deuas betek enni, ha gemeras an diou durzunel, prof ar vam baour hag a lavaras ar pedennou merket el leor sakr. Goudeze Mari ha Joseph a ginnigas o daou ho mab d'ar belek. Hema her c'hemeras etre he zivrec'h ; ha goude m'e deuz paet ar pemp sikl arc'hant, ar belek hen roas dezhi adarre.

D'ar poent-se memez, map Doue, sklav a volontez-vad, a en hem roe holl da Zoue evit he c'hloar ha silvidigez ar bed. Mari ha Joseph a rea assamez gantha ar memez sakrifis ; rei a reont da Zoue, evel he dra, an tenzor en devoa lakeat etre ho daouarn.

An daou bried santel a zistro neuze da Vethleem. Eul leo bennak dioc'h Jerusalem e tremenjont dre gichen karrek Elias. Eno oa bet chommet da ehana, eur pennad araok en hem deuler e kreiz ar gouelec'h.

Pelloc'h, e Rama, e velont bez Rachel. E kichen ar bez-se o devoa an Assyrianed kriz diframmet ho bugale digat ho mamou evit ho c'hass da Vabylon.

Allaz ! Brassoc'h profed eget Elias a zo e vont a benn nebeud da gemeret hent an dezert ha var crec'hchennou Rama e vezo prestik klevet klemmou hag hirvoudou kals goassoc'h c'hoaz eget epad deizioù ar gaptivite !





VII.

JESUS, MARI HA JOSEPH E TECH'ET D'AN EJIPT.

LPAD an noz a deuas goude an deiz-se mesket a joa hag a dristidigez, eun eal euz an env a apparissas da Joseph epad he gousk : « Savit, emezha, kemerit ar c'hrouadur hag ar vam ha kerzit gatho d'an Ejipt. Er vro-ze e chommoc'h ken na livirin d'eoc'h distrei. Rak a benn-nebeud Herodes a glasko ar c'hrouadur evit her lakaat d'ar maro. »

Raktal, an eal a dec'has eb rei da Joseph amzer da c'houlén eun ali bennak digantha. Ar patriarch santel a zavas dioc'h-tu ; pourchass a ra buhana ma c'hell peb tra evit ar veaj hir-ze, ha leun a fizians e Providans Doue, e za en hent gat Jesus ha Mari. Mari azezet var al loenik douss en doa douget anezhi euz a Nazareth da Vethleem a zouge he mabik etre he divrec'h. Sevel a rea avechou tristidigez en he ene ; mez eur zell great var Jesus a zigasse dioc'h-tuen he c'halon kalz laouenidigez.

Joseph, sioul, a gerze en ho c'hichen hag a veille varnho evel eur brovidans. Pedi a rea Elez Doue

d'ho miret mad dre an entchou fall oant e vont da ober.

Goude beza baleet epad div-heur, e veljont er sao-heol da Vethleem, kear Thecue. Eno ho zad koz David a gavas eul leac'h d'en hem ziouall ouz kounnar Saül. Dirazho, e velont an draonien da viken brudet, el leac'h m'oa bet diskaret arme Sennacherib gat kleze an eal. Pelloc'hik, var gern an duichen ema kear Ramah. E traoñ ar gear-ze e reas ar famill santel he c'henta ehan Goude an teir leo o devoa great dre hentchou meinek ha diskoumpéz, oa red mad chomm eur pennad a-za ha kemeret nerz.

Euz a Ramah, Joseph a drouc'has krenn varzu ar c'huz-heol. Tostik oant da Hebron. Joa e vije bet gatho saludi Zakarias hag Elisabeth, bizita bez ar patriarch santel Abraham ha guelet traoñien dudiuz Mambre a glevet ennhi c'hoas evel eun egleo euz mouez an Aotrou Doue e komz oc'h bugale an dud. Siouaz ! n'oa ket amzer da goll. Soudarded Herodes a ioa dija marteze laosket d'ho foursu.

E Tzirrah, e tremenjont an noz. Digouezout a rejont erfin e Lebhem, etre ar Judee hag an Ejipt. Tregont leo o devoa great e nebeud derveziou hag edont e vont er meaz euz stajou Herodes pa roas urz ar roue dinatur-ma, evit paka ar bugel-ze, da lakaat kement a vugale d'ar maro.

Ar roue koz a zo e paouez klevet ar pezh a zo tremenet en templ. Lavaret'zo dezha en deus an den santel Simeon anavezet ar bugel evit ar Mesias promettet d'ar bobl a Israël. Dont a ra da zonj dezha neuze euz a rouanez bro ar Sao-heol eat bete

kear David ha n'int ket distroet d'he balez goude beza gouskoude roet ho ger. Goapeat eo bet gatho. Ar zonz-se a laka anezha da vont er meaz anezha he unan. En dro dezha ne vel mui nemed inimied. Ar Juzevien o deus kassouni outha abalamour m'en deus lazet ho rouanez; he vap Antipater a zo en hem zavet en he eneb evit tenna digatha he gurunen hag he vuez; dourn Doue a boueze pounner varnha. Rak santout a rea dija oa taget gat ar c'hlenved spountuz a dlle her c'hass d'ar bez: ha setu ouspenn ar bobl a-bez a zo e vont da drei gat ar c'hrouadur-ze a rear anezha Salver Israël! En he gounnar, Herodes a gemenn da zont d'he balez he c'hoardou fidel, Thrased, Syted, Gallaeued, tud boazet dioc'h al lazerez hag e roas urz dezho da laza an holl vugale a Vethleem ha divardro beteg an oad a zaou vloaz.

Ar vuntreien a zisken d'ar c'halop da gear ar roue David, lammet a reont en tiez. Tenna'reont euz ar c'havel pe euz a dre divrec'h ho mam an holl vugale a zo c'hoaz oc'h ar vronn hag ho lazont digernez. Kaer o deus ar mamou paour krial ha pedi, kaer o deus klask tec'het, eur c'hleze bennak a gavont atao dirazho evit distruj ar vugaligou divlamze. Evel guechall, en amzer Jeremias, oue klevet var crec'hchennou Rama hirvoudou ha kri a zizesper. Rachel, euz goeled he bez, a gemere perz e trubuilou ar gragez-se, evit ouela ne ket mui var bugale kasset da Vabylon mez var bugale kasset d'ar maro.

Mamou keiz! Sec'hit ho taélou. Ho pugale a lzo lazet; hogen maro int, ho goad a zo bet skuil et evit ar Map-Doue; hag euz an eil kantved d'egile

bete fin ar bed, milierou a voueziou a gano en ho henor e pep bro: *Salvete flores martyrum*. Ni ho salud bokedou ar verzerien distaget ken abred dioc'h ar vuez gat ar bourreo evel ma vez eur rozen var an digor diskaret gat eur barr amzer!

Goude ar vuntreuz euzuz-se, ar roue a grede beza deuet a benn da laza ar bugel a rea dezha kement a nec'hamant. Petra ne vije ket bet eta he zizesper, m'en dije gellet guelet an hini a grede beza beuzet er goad, moredet sioul-braz etre divrec'h he vam, var douar an Ejipt!

Pa erruont var douar an Ejipt, Joseph ha Mari a vel dirazho an dezert oa bet ho zadou koz e troidellat ennha epad daou-ugent vloaz. Eno o devoa drebet ar mann, evet dour eur ar stivel, resevet lezen Jehovah e kreiz an tan hag ar gurun; guelet a reant a ziabell kern ar Sinaï. Leun a fizians en Doue en doa tennet an Hebreed euz ar broiou gouez-se, n'oa enno na dour nak hentchou, ar veajourien santel a gerz dre'r broiou-ze ne anavezont ket. Goude beza great e-ser tregont leo a-ed ar mor braz e c'hoarvezont e Faramah. Eno, oa bet Joseph e tigemer he dad Jacob. Neuze e pignont ed-a-ed an Nil, ster vraz an Ejipt hag e treuzont meziou druz ha pinvidik Tanis. Moizes en doa great var an dachen-ze eun niver braz a viraklou evit gloar Doue. Pemzek dervez goudeze edont en He-liopolis, e kreiz an Ejipt. Eno e c'hortozont urziou an Aotrou Doue.

An Ejipt, d'ar mare-ze, a ioa evel eun templ ledan, karget a idolou. Lod euz ho doueou o devoa dremm tud; mez adori a reant ouspenn ar stered, an anevaled ar re loussa, ar plant hag al legumaj

euz ar jardinou. An holl diaoulou euz an ivern a zebante darempred ar vro ze. Heliopolis, kear zantel an Ejiptianed, gat he zempl en henor d'an heol, gat he c'houentchou beleien ha doktored a ioa evel kaloun ar relijion dre an holl vro. Dioc'h daou du ar ster, euz a Vabylon hag euz a Vemphis e tiredet di evit festou braz Osiris.

Gouskoude, e kreiz ar gear baian-ze, Doue en devoa dispartiet eur vro nevez d'ar c'heiz tud-ze kasset kuit euz ho bro goz. Goude m'oa bet diskaret Jerusalem hag an templ, eun niver braz a Juzevien a deuas d'en hem repui d'an Ejipt. Goudeze e c'herruas eno c'hoaz ar re a ioa bet kasset kuit gat Antiochus. An dud keiz-se en hem dennas er c'heriou braz, mez dreist holl en Heliopolis ha vardro. Evit derc'hel sonje euz ho bro hag euz a relijion ho zadou koz o devoa savet er gear-ma eun templ da Jehovah, ag a ioa, koulz lavaret, ker kaer ag hini Jerusalem.

Joseph ha Mari en hem gavas eta eno gat tud euz ho bro. E touez ar Juzevien-ze e labourjont bemdez evit gounid ho zam bara. Evel e Bethleem edont en dienez ar vrassa. Evit ti n'o devoa nemed eul lastez keo ; hogen Jesus a ioa gatho ; aoualac'h oa evit karga ho c'haloun a joa e kreiz ho zrubuilou.

N'oa ket ken dispount roue kriz Israël en he balez aour, e Sion. Nebeud amzer goude lazerez Bethleem, Doue a skoas var al loan gouez-se hag a roas dezha eun tanva euz a boaniou an ivern. Eun dersien domm, evel eun tan elumet en he greiz, a uz anezha bete mel he eskern. Dare oa gat an naoun, ha kaer en devoa drebi ne elle ket dont a-benn

d'he zerri. He gorr, drebet e beo gat ar prenvad a ioa gatha flear eur c'horv maro e breinadurez : He vouzellou a ioa leun a c'houlou. He nervednou a ioa en hem zastumet ; he vemprou a ioa c'hoezet gat an dour a ioa enno ; ar pezh a rea dezha kement a boan ma laoske kriadenno spountuz, ken na lavare an dud euz he balez : « Dorn Doue a sko an den-ze abalamour d'he dorfejou. »

Evel ne c'houient mui pe zoare remejou rei dezha, he vedisined a roas urz d'her c'hass da zour Calirhoë, demdost da Jéricho. Diskennet oue en eur gibel (bain) eol ha bitum. Mez a veac'h edo ebars ma kloz he zaoulagad he ma seblant he gorr koeza a bastellou. Ar Juzevien, o sonjal oa maro a zirollas da grial ha da gana gat ar joa. Evit ho funissa e lakeas prizounia e Jericho tud euz ar familhou kenta : « Pa mezo tennet va huanad diveza, a lavaras-hen d'he c'hoar Salome a ioa ker fall ag hen, c'hui neuze a roi urz d'am zoudarded d'ho laza holl a daoliou bir. Evêlse e vezin sur e vezo daëlou e Jerusalem deiz va maro ! » Prestik goude, e klaskas toulla he galoun gat eun taol kountel ; mez unan euz he nized a viras outha en dro-ze d'en hem laza. Gouskoude ar brud euz he varo a redas evit an eil guech e touez an dud hag a deuas beteg he vap Antipater a ioa neuze er prizoun, evit beza klasket laza he dad. Mall eo gatha pedi mestr ar prizoun da derri he jadennou. Hogen pa glev Herodes kement-se, e ro urz d'her laza raktal en he brizoun. Pemp dervez goudeze, an torfetour braz-se a varve d'he dro, mallozet gat ar bobl ha mallozet evit biken gat Doue.

Etretant, ar familh santel a veve dinec'h en He-

liopolis. Epad meur a viz e trebas c'hoaz he zam bara er vro estren. Aliez Joseph ha Mari a droe ho daoulagad varzu ar vro a garie ho c'haloun, ha sentuz bepred ouz Doue e c'hortozent ma vije plijet gatha rei dezho urz da zistrei. Eun abardaez, eal Doue a apparissas adarre da Joseph dre he gousk : « Savit, emezha, kemerit ar bugel hag ar vam ha distroit da vro Israël : Rak maro int, ar re a glaske lakaat ho mab d'ar maro ! »

Joseph raktal a zavas ; kemeret a reas ar bugel hag he vam hag e tistroas da vro Israël dre an hent en devoa great, a ed ar mor. Digouezet bete douar ar Judee, edo e vont da drei varzu Bethleem. Mez kement a freuz a ioa bet er vro-ze, ma zoa nec'het-maro. Lavaret oue dezha e zoa Archelaüs, roue var lerc'h Herodes hag he vap, ker kriz evit ar Juzevien, ma n'oa ket krissoc'h zo-ken eget he dad. Anter kant euz ar pennou braz euz ar Judec a ioa eat da Rom da bedi an Impalaer da denna peb galloud digat Archelaus. « Herodes, emezo, a ioa kentoc'h eul loan gouez eget eun den. Esperout a reamp e vije furroc'h he vap. Faziet omp : rak ema e paouez laza tri mil euz hon tud e diabarz an templ santel. » Ar gannaded a c'houlenne eta ma vije torret testamant Herodes ha staget ar Judee ouz rouantelezh Rom. Mez August ne fellas ket dezha terri testamant Herodes ; mez ranna' reas ar Palestiin e teir loden, unan evit peb hini euz he vugale. Archelaus en devoue evit he lod ar Judee, ar Samarii hag an Idumee ; Herodes Antipas en devoue ar Galilee hag ar Peree ha Philipp an holl stajou all en tu-all d'ar Jourden.

N'oa ket brao da Joseph distrei da Vethleem. Ne

oa nemed eiz miz a-veac'h ma zoa tec'het ac'hano ar famill santel. Ma tiouesse dezhi distrei, ne vankfe ket a dud d'hen diskuill d'ar roue gouez hag ar c'hrouadur a ve en danger. Epad ma rodelle ar sonjou-ze en he spered, oue kemennet dezha, en ure, distrei da Nazareth. Gat aoun rak Archelaus, e pignas d'ar Galilee dre ribl ar mor, Gaza, Ascalon, Joppe ha Sezaree. Sesaree oa ar gear pella en tu-ze euz stajou Archelaus. Ac'hano e pignont var menez Carmel hagerfin setu-hi e Nazareth goude eur-veaj a bemp leo ha c'huac'h ugent.

Setu penaoz e sevenas komz an Aotrou : « Karet em euz Israël-evel ma kar eun tad he grouadur, ha setu perak em euz ho tennet euz an Ejipt. » Doue en devoa torret chaden an Israelited a ioa sklaved, ho c'hasset en devoa a-dreuz ar mor ruz beteg an douar promettet da Abraham, Isaac ha Jacob. Hogen Israël n'oa nemed ar figur pe ar skeuden euz he vap. Evit tenna euz an Ejipt ar muia-karet euz he galoun, e vruzun dindan he dreid eur roue kriz ha didruez ; ha divar ribl an Nil e tigass ar c'hrouadur dre eun hent great gatha, bete bro he dadou koz.





VIII.

NAZARETH.

KEAR Nazareth a zo e kreiz ar Galilee. Var-dro tri mil den a gountet ennhi, an darn-vuia anezho artizaned ha labourerien. Er bourkik-se sioul ha didrouz, e tremenas Jesus he vugaleach hag he iaouankiz. Eno e kreske e furnez hag e santelez dirak Doue ha dirak an dud, dre ma kreske en oad. Ar bed ne vele ennha nemed eur c'hrouadur evel ar re-all, mes en tu-all dezho gouskoude dre he vertuziou hag he furnez. Eaz oa anaoud e zoa eun ene mignoun da Jehovah.

Pa deuas d'an oad a zaouzek vloaz, he gerent a gassas anezha evit ar vech kenta da Jerusalem evit goueliou Pask. N'oa ket mui da gaout aoun rak Archelaus. Rak August en devoa kasset anezha kuit euz ar Judee evit mont e touez ar Gallaoued. Mari ha Joseph, gat ho map, a ieas eta e kompagnunez bandennajou tud a ioa e vont d'ar gear zantel. Epad eiz dervez Pask, Jesus a ellas pignat aliez d'an templ da boent ar sakrifis, guelel al loened var an aoter ha klevet an doktored e c'hesplika d'ar bobl lezen Moyses.

Pa zeo echu ar gouel, tud ar Galilee a vandennou

a zistro d'ar gear en eur gana salmou a levez, ken na dregerne ar menezioù. Da zerr-noz, e c'heruont e kichen Bethel. Eno edo ar c'henta ehan etre Jerusalem ha Nazareth. Mari ha Josepha glask ho map a gredent chommet gat ar gren-potred euz he oad. Mez kaer o deus mont euz an eil bodad tud d'egile, ha goulenn kelou anezha, den n'en deus her guelel. Ankeniet, e tistroont var ho c'hiz bete kear Jerusalem. Eno, epad tri dervez e veljot anezho dre ar ruiou, en tiez, el leac'h ma sonje dezho her c'haoud. Kollet o doa ho foan. Neuze e pignont d'an templ evit furcha ar porchedou, ar zaliou...

D'an heur-ze, edo ar brassa doktored e c'hober skol er Synagog. Dirazho e zoa eun niver braz a dud a ioa deuet da glevet esplika al lezen. Peger mantret oue Joseph ha Mari, pa veljont ar c'hrouadur a glaskent abaoue tri dervez azezet e kreiz an doktored. Da heul ar re all Jesus a ioa eat beteg eno evit klevet kenteliou doktored Israël. Mez dre ar goulennou a rea ha dre ar furnez euz he respountchou, e tremenas dirazho holl evel eur Mestr. An holl a ioa sebezet, ha goulenn a reant an eil digat egile euz a beleac'h e teue dezha an deskadurez-se, ne elle beza kavet, ker iaouank c'hoaz, nag e kenteliou nak e leoriou an dud habil.

Joseph ha Mari ne glevont nemed mouez ho c'haloun. Mont a reont dre greiz ar bobl bete kador an doktored :

« Va map, a lavar neuze ar c'heaz mam-ze, petra o c'heus-hu great ; setu tri dervez a zo emaoump oc'h ho klask, ho tad ha me, nec'het-marol !

« Ha perak hem c'hlaskec'h, emezha gat dousder ; ha ne ouiec'h ket e tlean beza holl evit an traoù a zell ouz va zad ? »

Ar c'hrouadur evit senti ouz Doue hag ober he volontez a deu er meaz euz an templ gat he gerent hag a zistro da Nazareth.

Eno, e ti dister Mari, e kreiz etre tiez guenn Nazareth, ker koant da velet var gostez ar menez, e koumansas rouantelez Doue; ar rouantelez oa deuet Jesus da brezek d'an douar. Pell diouz ar bed, pell dioc'h kement a elfe kemeret e kaloun an den plass an Aotrou Doue, Jesus ne veve nemed evit he dud. Senti a rea ouz Mari ha Joseph evel eur map parfet. Epad ma vije Mari ec'h ober he c'heusteuken, hen a vije-gat he dad mager er stal-labour hag a laboure assamez gatha gat ar vouc'hal, gat an esken. Dougen a rea var he ziouskoaz bec'hchou pounner; hag e doug an amzer-ze he ene leun atao euz a zonz an Env, a droe varzu Doue, he garantez unik, ha varzu he vreudeur oa deuet da brena evit rei gloar da Zoue an tad pehini a zo en Env. En noz, pa deue ar c'housket da gloza he zaoulagad, he galoun birvidik a ioa c'hoas di-hun.

Evel ho map divin, Joseph ha Mari ne vevent nemed evit Doue ha ne glaskent nemed ober peb seurt vad. Evelse an holl dervezioù, e Nazareth, a ioa henvel, deizioù a beden hag a labour, a beoc'h hag a eurusted, ne vijent ket mesket gat an techou fall, na tenvaleat dre ar pec'hed.

Setu a-ze, buez Jesus epad meur a vlavez, buez kuzet, evit an holl dud. Evel se eo e tlie koumans he genteliou var rouantelez Doue en eneoù. Hogen deizioù all a ioa e vont da zével evit mab an den, ha Mari n'elle ket sonjal enno eb spount. Ne doa ket ankounac'heat komzou ar profed koz Simeon. Kle-

vet a rea dija kalz tud e c'hrosmolat; santout a rea beg ar c'hleze a dlle digeri dezhi he c'haloun ha seblantout a rea dezhi guelet ar groaz en he za.

Eb dale, an ti santel a oue e kaoñ. Ar patriarch santel Joseph en devoa perachuet var an douar ar pez a c'houlenne Doue digatha. Eur vech c'hoaz he zaoulagad a droas gat teneridigez varzu map Doue ha merc'h ar roue David, an daou denzor kaer-ze fiziet enna, hag epad m'edo Jesus e rei dezha he vennoz, he ene douget var diouaskel an Elez a nijas da balez Abraham.

Goudeze Jesus a c'hortozas e kichen he vam an heur d'en hem ziskuez d'ar bobl. Avechou e pigne var ar menezioù a zo en dro da Nazareth hag ac'hano he lagad a vele ar c'heriou hag ar c'heriadennou e zei a benn-nebeud da c'houlenn digemer enno; guelet a rea lenn koant ar Galilee, menez Thabor, ha, dreist menez Karmel, ar mor braz, tu ar c'huz-heol. Sonjal a rea neuze er boblou azezet e skeud ar maro; e Jerusalem, di ar boblou konvertisset a deui da enori he vez; e Rom, galvet da veza ar penn euz he rouantelez. Demdost da Rom an elez divezatoc'h a zougo an tiik santel a Nazareth! Hag e pede stard he dad da lakaat buhan da c'houlaoù an deiz ma c'hell mont dre ar bed da splanar ar c'hellou mad, da brezek aviel ar zilvidigez.





TAOLEN.

	PAJEN.
I. Zakarias	9
II. Mam ha guerc'hes	18
III. Mari hag Elisabeth.	26
IV. Nedelek	31
V. Rouanez ar Sao-Heol	38
VI. Jesus kasset d'an templ	45
VII. Jesus, Mari ha Joseph e tec'het d'an Ejipt	50
VIII. Nazareth	58





Imprimerie N.-D. des Prés. — Ern. DUQUAT, directeur.
Neuville-sous-Montreuil. (Pas-de-Calais.)